



## Kantick Sant-Paban

Diskan :

*O Sant Paban, o Sant Patron  
Ni ho ped holl a vir galon ;  
Selaouit ouz hor pedennou  
M'az aimp ganéoc'h holl d'an Nenoou* } bis

1

Pardon Laban, a bell amzer  
A zo brudet dre ar c'harter,  
Hag hirio c'hoarz Parrez Laban. } bis  
A rent enor da Zant Paban.

2

Guelet e vez, a vandennou,  
An dud vras, ar vugaligou  
Dirag e skeudenn daoulinet } bis  
Evit goulenñ nerz ha yec'hed.

3

Met evit ma vimp selaouet  
Gant hor Zant Patron benniget,  
Dalc'homp sonj ouz ar c'henteliou } bis  
A giunig d'omp e vertuziou.



4

En e gou-ent, pell diouz ar bed,  
Pep madou gantan dilezet,  
E kavas an tenzor gwirion. } bis  
An hini a leun ar galon.

5

Madou ar bed zo didalvez...  
Klaskomp kentoc'h ar zantelez :  
Rag houman hag houman ebken } bis  
A c'hell renta eurus pep den.

6

Kounaret holl, au droug-spered  
Na ro d'ar zant repos ebet :  
Implij a ra e holl ardou } bis  
'Vit e baka en e lasou

7

Paban, seder hag eb anken,  
En em ro muioc'h d'ar bedenn,  
Ha der binijennou kalet } bis  
A zalc'h penn d'an diaoul milliget.

8

Perak. kristenien, ez omp-ni  
Ken dinerz, ken es da drec'hi ?  
Bezomp aketus d'ar bedenn : } bis  
Ar bedenn eo nerz ar c'hristen

9

O Sant Paban, evel ar gliz,  
Skuilhit hirio war hoc'h iliz  
Zo bet savet gant hon tud koz, } bis  
Skuilhit warni puilh ho pennoz.

10

A bep tu d'eomp evel bleizi,  
Enebourien 'zeu d'hon senti ;  
Diwallit ho servicherien } bis  
Ouz skoueriou fall ar bec'herien.

11

Ni c'houlenn ivez ho skoazell  
Ewit hor bro ger Breiz-Izel ;  
Silet vez enni kredennou } bis  
Evel diskar feiz hon tadou.

12

Roit d'hor spered, ó Sant Patron,  
Sklerijenn ha nerz d'hor c'halon ;  
Ennoc'h ema ho hol fizians ; } bis  
Deut da zikour Breiz hag ar Franz.

13

Grit ma vezo, en hon ene  
Gras Doué o vleunia bemde,  
Rost ha frouez war ar mêziou } bis  
Ha furnez en tiegeziou.

14

Ha pa vezo deut an termen  
Da guitât bro ar binijenn  
C'houi a gaso ho pugale } bis  
Da vro ar zent hag an Ele.

**Aotre da voula :**

*Kemper, 18 a viz Gouere 1942.*

P. JONCOUR, oikel bras.